

- ✓ **Ar gallegañ:** levezon sevenadurel 220 million a dud a ouia gomz galleg er bed; yezh ofisiel an ONU hag ar c'hoarioù olimpek. Strolliñ a ra ar gallegañ zo 80 Stad **en OIF(Aozadur etrevroadel ar gallegañ)** sikouret get ar mediaoù(TV5 ,France 24)hag ar liseoù gall en estrenvro.
- ✓ **Ar sevenadur** gall kaset àr-raok get ar glad, ar sinema, ar gastronomiezh, al lennegezh, doare-beviñ Frañs.

Levezon  
sevenadurel

- ✓ Pennaennoù ha talvoudoù: **demokratelezh, peoc'h, justis**
- ✓ **Kentañ pol touristel bedel:** 620 million a douristed ha 55% ag ar redoù etrevroadel.

- ✓ **6vet galloudegezh** etrevroadel: Eilvet en UE
- ✓ **Firmoù treuzvroadel:** Michelin, Carrefour, Danone, Sanofi evit al louzoù, Safran evit kefluskerioù kirri-nij.
- ✓ **Takadoù birvidik:** apotikerezh, hidrokarburioù, porfumerezh,gounezvouederezh.

Levezon  
ekonomikel

- ✓ **ur pol-bed:** kentañ galloudegezh ekonomikel er bed : 25% a PDG ar bed dirak SUA ha Sina
- ✓ **Kentañ galloudegezh kenwerzh:** 40% ag ar c'henwerzh etrevroadel
- ✓ **Kentañ galloudegezh labour-douar, industri ha servijoù ivez.**
- ✓ **Ur galloudegezh arc'hantourel:** roll an euro,

- ✓ **Tiriadoù tramor àr bep kevandir hag pep meurvor.**
- ✓ an Eil galloud-mor er bed: **takad ekonomikel miret divent** (takad mor, betek 200 miltir ag an aodoù(370 kilometr) a chom edan gwir korvoiñ nemetañ ur Stad(ZEE).
- ✓ **Bonoù -arme àr bep meurvor** evit gwareziñ ar peoc'h hag ar frankizoù pennañ.
- ✓ E-barzh rac'h an **ensavadurioù etrevroadel : ABU, OTAN, OMC....**get ur rouedad ambasadoù e pep lec'h.
- ✓ Ezel ag an ONU: **kuzul Surentez an ONU**

Levezon  
geopolitikel

- ✓ **Rol politikel etrevroadel** da gadarnaat ( skoazell ar stadoù àr ziorren)
- ✓ **Takadoù tramor àr pep kevandir**

- ✓ **Dizindustrializadur, dilabour,treuzlec'hiadurioù:** kevezerezh ar BRICS ha SUA
- ✓ **Divigad kenwerzhel**

Ar bevennoù

- ✓ **Rol diplomatek** ha geopolitikel da gadarnaat:: politikerezh difenn ebet, arme boutin ebet, surentez diabarzh an UE ebet.
- ✓ **An daeoù:** poblañs àr-goszhaat, sujdidigezh energiezh, tommadur an hin hag ar saotradur, eurodamgredourien.

# Frañs en UE

## 1. Un oberour pennañ eo Frañs en UE

- Plas geografel ag ar c'hentañ: **div etrefas (zonenn darempred hag eskemmoù etre 2 dakad)**
- Unan meurvorel ha kreizdouarel
- Unan kevandirel

Gorread an tiriad gall: 552 000 km<sup>2</sup> (41 vet plas er bed) get 4 talbenn- mor : mor an Hanternoz, Mor Breizh, Meurvor Atlantel ha Mor Kreizdouarel.


**Ezel pennañ** an UE abaoe 1957 he deus Frañs ur rol politikel pennañ. Emañ en eil renk en UE evit arc'hantiñ budged an UE hag ivez kaout skoazelloù.

**Ar rannvioù treuzbevennoù** e vez pleustrek al liammoù etre ar geodediz europat: da skouer **er Pireneoù** ez eus un takad treuzharzoù tro-dro d'ar rannvro Midi-Pyrénées-Languedoc-Roussillon ha Katalonia Bro Euskadi e-lec'h ez eus raktresoù a bep seurt el an « Eurocité Express », ur seurt RER evit a San Sebastian da Baiona. Savet eo bet ivez ar c'hentañ ospital treuzharzoù europa e 2014 e Puigcerdà: e-lec'h sevel unan a bep tu ag an harzoù eo bet krouet nemet unan e Puigcerdà. Bemdez ar geodedia a dreuz an harzoù evit al labour pe an dudioù. Arc'hantet eo bet ar raktres get ar FEDER dre ar CTE (coopération transfrontalière européenne) a-benn diorren liammoù etre takadoù ha poblañsoù dispartiet get get harzoù-Stad.

**2. Kroazhent ar c'hornôg europa eo Frañs:** setu perak ez eus a bep seurt raktresoù evit enframmiñ ha kenstagiñ Frañs get ar broioù amzezienda skouer eo bet kroget **ar raktres riboul Lyon-Torino**. Pal pennañ ar rouedad Lyon-Torino eo treuzkas ar marc'hadourezhioù àr hentoù-houarn.

Hiziv-an-deiz 90% ag an eskemmoù etre Frañs hag Italia e vez àr an hentoù. Lec'hiet e-kreiz Europa, an Alpoù eo ul lec'h-tremen ret etre Europa an Norzh hag Europa greizdouarel/ Lakaet e vez ar c'hirri-samm àr an hentoù-houarn=

## HOUARNROUTA



© Savet get Valeri Nicolas

Partager de nouveaux équipements : l'hôpital de Cerdagne à Puigcerdà  
Les populations française et espagnole n'atteignent pas séparément la taille nécessaire pour justifier la construction de deux hôpitaux. Avec le soutien de l'UE, cet hôpital transfrontalier a ouvert ses portes en 2013.  
D'après www.europe-en-france.gouv.fr, 2015.

# Roll Frañs hag UE er bed

## Frañs hag Unaniezh Europa, ul levezon war ar bed, galloudegezh diachu

### I. Frañs hag he levezon àr ar bed

Un DROM(Departamant ha rannvro tramor): diazez bezañs Frañs er bed a-bezh

#### Gwadaloup

Un enezenn en **Antilhez c'hall er C'haraibez**

**Poblañs:** 405 500 annezad

Get Martinik e kemer perzh Gwadaloup e **sked Frañs** e takad Karaibez get:

- **Ur bezañs soudardel** get bon-arme staliet ha nerzhioù-arme é labourat evit an ONU (Haiti)
- **Ur bezañs sevenadurel** get liseoù gall e Haiti , San Salvador... hag ivez Stadoù ezel ag an **OIF(Aozadur Etrevroadel ar gallegañ)** evit labourat àr ar yezh, ar galleg ha talvoudoù(peoc'h, demokratelezh, DD)
- **Ur bezañs ekonomikel:** an touristelezh kaset àr-raok get un aerborzh etrevroadel e Pointe-à-Pitre(Gwadaloup)

#### Ur levezon àr ar bed

- Tiriadoù tramor àr bep kevandir hag pep meurvor
- Un takad ekonomikel miret divent (takad mor, betek 200 miltir ag an aodoù(370 kilometr) a chom edan gwir korvoiñ nemetañ ur Stad(ZEE):an Eil galloud-mor er bed.
- **Bon-arme àr bep meurvor.**

#### Ur galloudegezh politikel: an eil rouedad diplomated er bed

- Ur galloudegezh nukleel
- **Ezel a aozadurioù etrevroadel pennañ**(ONU, FMI, Kuzul Sutentez an ONU, OMC Aozadur etrevroadel evit ar C'henwerzh)
- Liammoù get Afrika(skoazell evit an diorren)

#### Ur sked sevenadurel àr bep kevandir dre he yezh:

- **Ar gallegañ:** levezon sevenadurel 220 million a dud a ouia gomz galleg er bed; yezh ofisiel an ONU hag ar c'hoarioù olimpek
- Ar sevenadur gall kaset àr-raok get ar glad, ar sinema, ar gastronomiezh, al lennegezh, doare-beviñ Frañs
- Ar gallegañ zo 75 Stad strollet **en OIF(Aozadur etrevroadel ar gallegañ)** sikouret get ar mediaoù(TV5 ,France 24)hag ar liseoù gall en estrenvro.

#### Met ul levezon é tigresk:

- **Kevezerezh get ar SUA** hag ar Stadoù é **tiflukiñ(àr askoriñ)**
- Àr-gil e ya ar gallegañ dirak ar **patrom sevenadurel anglo-sakson.**

## II. Galloudegezh ha bevennoù an Unvaniezh Europa

### Sked an UE:

- **7 Stad** a c'houlenn mont e-barzh UE
- **Eskemmoù get he amezeien:** kenwerzh, un douar enbroiñ, touristelezh...
- **Emglevioù :** politikerezh Europa an amezegezh: kroget e 2004, pal ar politikerezh-se eo gwellaat an darempredoù etre an UE hag hec'h amezeien ha n'emaint ket e soñj mont e-barzh UE.
- **Ul levezon sevenadurel a zifenn** an demokratelezh ha doujiñ gwirioù mab-den

### Ur galloudegezh etrevroadel:

- **ur pol-bed:** kentañ galloudegezh ekonomikel er bed : 25% a PDG ar bed dirak SUA ha Sina
- **Kentañ galloudegezh kenwerzh:** 40% ag ar c'henwerzh etrevroadel
- **Kentañ gallougezh labour-douar, industri ha servijoù ivez.**
- **Ur galloudegezh arc'hantourel:** roll an euro,
- **Kentañ pol touristelezh er bed.**

### Bevennoù d'he galloudegezh:

- **Disemglevioù da gomz a-unvouezh:** roll diplomatek bevannet
- **Peseurt identitelezh** sevel àr-lerc'h bout degemeret meur a vro nevez
- **Enkadenn arc'hantourel** abaoe 2008: euro, dle ar Stadoù ezel èl Bro C'hres
- **Kevezerezh etre ar meugêrioù-bed** èl Londrez, Pariz, Rotterdam, Frankfurt
- **Stadoù ar Su hag ar Reter** a chom get diaesterioù (dilabour, dle)